



HISTOR

AN ERMIT YAN GUERIN.

Var an ton ancien.

CHRISTENIEN devot d'ar Verc'hes,
 CEvidomp oll advocades,
 Clévit un histor manifiq,
 Approuvet mad hac otantiq.

Clévet oc'h eus, me voar ervad,
 Comz eus a Vontagn Montserrat,
 Eur plaç dediet d'ar Verc'hes,
 En eê, en douar rouanes.

Peder leo anter contet mat
 A zo d'ober tro Montserrat,
 Eur montagn a ur men antier,
 Admirabl en e hueder.

Evit e situation
 Zo seiz leo anter diouz Barcelon :
 Me gred n'en deus var an douar
 Un all hac a ve dezi par.

Rac var ar men-mâ, ententet,
 A bep seurt louzou zo cavet :
 Fourdilis, ros ha pep seurt plant
 En hân, er gouân fleurissant.

Eno guechall, eme ar scrit,
 Approuvét, e oa un ermit,
 E hano voa Breur Yan Guerin,
 Un den vertuzus ha divin.



002 774 / 1

J 59

Eno en doa un ermitach,
 Hac ur c'havarn evit partach,
 Ar griziou louzou evit boued,
 Evit guele douar caled.

Continuel en orêson,
 Yuniou ha meditation;
 E nep fêçon an den santel
 Na gommeite pec'het marvel.

Mes an diaoul zo e pep tremen
 O clasq tenti ar gristenien,
 Finessaou a invantas,
 Ha dre bere en decevas.

Formi a ra gant dilijanç
 Ur c'havarn all en apparanç,
 Ha qemeret dre illuzion
 Habit un ermit a fêçon.

Monet a ra da zaludi
 Breur Yan Guerin betec e di,
 Da ober dezàn complimant
 Dre gomzou caer hac eloqant.

Boujour deoc'h dre güir amour,
 Va breur Doue, eme an traitour;
 Amezeyen omp tost meurbet,
 Ha biscoas n'oam en em velet.

Mes da vigen, me en assur,
 Ni a guemero plijadur
 D'en em darempredi alies,
 Hac o conferi assambles.

An autrou Comt a Varcelon
 En devoa ur verc'h a fêçon,

Hac en em gave possedet

D'ar poent-se gant an drouc-speret.

D'ar plaç santel e oue goestlet,

Ha gant tud devout bisitet,

Ha conjuret an ærouent,

En avis e gass en e hent.

Evit peden nac orêson,

Offrançou na supplication,

Ne vijent biqen deut a ben

Da zelvira ar femelen.

Mes an diaoul n'allas qet nac'h,

A gomzas dre c'homzou ar plac'h,

Hac a lavaras evellen,

Publicamant e ber termen.

Breur Yan Guerin zo ermit mat,

A zo o chom e Montserrat,

Hac a zo mignon da Zoue;

Dre ma er servich nos ha de.

Mar cassit ho merc'h davitan,

Ha mar chom nao debes gantàn,

En oblijo, dre e beden,

Da zilêzel ar femelen.

Mes ma ne achu an naovet,

Me en tou deoc'h hac a bromet,

Sur e retournin adare,

Hac e zourmantin a nêve.

Ar C'homt an dra-se pa glêvas,

A bartias gant un trein bras,

Da gass e verc'h da Vontserrat,

D'e fresanti d'an ermit mat.

4

Goude m'en d'oa en saludet,
 Hac e verc'h deân presantet,
 En er supplias humblamant
 Da gonjuri an ærouant.

Incontinent Breur Yan Guerin
 A stouas prest var e zaoulin,
 Da regeti a vir galon
 Asistanç ouz Roue an tron.

Goude m'en devoa conjuret
 Breur Yan Guerin an drouc-speret,
 Gant mez ha gant confusion
 E sortias an ampoeson.

Ar C'homt hac e gompagnunes,
 Ha Breur Yan Guerin assambles,
 A rentas graçou da Zoue,
 Ha da Rouanes an æle.

An autrou Comt a supplias
 Breur Yan Guerin gant instanç vras,
 Da viret e verc'h un naovet,
 D'e c'honfirma e graç parfet.

An ermit mat n'em excusas,
 D'an autrou Comt a respontas
 N'en devoa qet a diegues
 Da loja eur seurt compagnunes.

Salocras, eme an autrou,
 Nemet hi hepquen a chomo;
 Ni yêlo da draon ar menez,
 Qen a vo achu an nao dez.

An ermit er c'homançamant
 En e instruas puissamant :

Mes e guenet hac e feçon
O deus anflamet e galon.

Gant an tân a goncupissanç,
N'en deus repos nac assuranç,
Ma sorti en espet mont quit,
Ma rancontras ar fos ermit.

Ma contas dezàn prontamant,
E voa en poan hac e tourmant,
Hac e guell oc'h gantàn quitat,
Rac e speret n'alle mui pad.

Nonpas, eme ar fos ermit,
N'o qelennàn qet da vont quit :
Retornit, stourmit constamant
Ous a laçou an ærouant.

Sant Anton, a ouzoc'h ervat,
A oa devot hac ermit mat,
Hac a zo bet alies tentet,
Ha bepret en deus resistet.

Er Scritur memes eo lavaret :
Mar fell deomp beza curunet,
E rencomp bepret combati
Pa zeu an drouc-æel d'hon tenti.

Senti a ra ouz e avis,
Ha retorn a ra var e c'his ;
Mæs selaou ar plac'h yaouanq
En rent adarre languissant.

Eun nosves e oe qen tentet,
Ma oue gantàn disenoret,
Ha commettet fallagries ;
En despet d'e oll santeles.

Pa en devoa grêt ar pec'het ,
 Hac e bassion contantet ,
 E teu dezàn ar repantanç ,
 Hac eur remors a gonsianç.

Retorn a ra c'hoas da gavet
 Ar faos ermit , ha da laret
 En devoa grêt fallagries ,
 Hac e c'houlèn qelennadures.

Me lavar did , eme eguile ,
 Pa ouezo ar C'homt an drase
 A laqai pront da zistroja
 Ha da güittât eus ar bed-mâ.

Va c'hred , eme ar faos ermit ,
 Las-hi buan hac achap qäit ,
 Ha cuz-hi eun tu a goste ,
 Elec'h na ouezo den doare.

Senti a ra : gant e gontel
 E troc'h gousoug an demêzel ,
 Neuze en deus-hi enterret
 Elec'h biqen ne vize cavet.

Incontinent ar faos ermit
 Eus e grim a ra ar recit ,
 Hac e teu d'ober goab anezàn ,
 Incontinent o disparissàn.

Ar paour qæs a oe estonet
 O velet ervat voa tromplet ,
 Penaos e oa an drouc-speret
 D'e drompla en em dransformet.

E galon leun a huanad
 An daëlou en e zaoulagad ;

An hent da Rom a ra timat ,
Da anzaio e grimou d'ar Pab.

Ebars e Rom pa erruas ,
Comz gant ar Pab a c'houlennas ,
Ma oue roet dezàn antre
Hep na fêçon na difficile.

Da dreid ar Pab en em dolas ,
Côves gantàn a c'houlennas ;
E grim en deveus anzavet ,
Ar Pab en deveus-én absolver.

Mes dezàn e oue ordrenet
Ur binigen rust a caled ;
Selaouit-i oll , me ho ped ,
Biscoas e seurt n'oc'h eus clêvet.

Commandet oue dezàn gant ar Pab
Retorn da montagn Montserrat ,
Var e barlochou neuze ractal ,
Eguis un aneval brutal.

Chom à hed seiz vloas evelse ,
Hep sellet james ouz an eê ,
Qen a ziguje ur buguel
Da lavarar dezàn sevel.

Breur Yan Guerin a acceptas
Ar binigen gant ur joa vras :
Var e zaou dorn hac e zaou droad
E commanças hent Montserrat.

Me o lèz da gonsideri
Pe seurt poan , fatic hac anui
An ermit paour a andure ,
Oc'h ober hir hent evelse.

8

Neuze gant poan ec'h arruas,
 E binigen a guntinuas ;
 Mes allas ! e zae a uzas.
 Gant an amzer, ma oa en noas.
 Ar reun, ar bleo zo divoanet
 Var e gorf, ma oue da velet
 Evel un ours pe un oc'h goue,
 Qement er güele a estone.
 An autrou Comt a Varcelon
 A guemeras opinion
 Evel inspiret gant Doue
 Da vont d'ar vontagn d'ar chasse.
 Al livrini hac ar chass red
 Gant ar c'havara zo arruet.
 Mes ne gredent nemet harzal
 O velet ur sort aneval.
 An dud dre ar brud zo redet,
 Hac oll e zint bet estonet ;
 Mont unan aneze gant spont
 D'ober recit d'an autrou Comt.
 Ar C'homt en deveus lavaret,
 Mar boa moyen e guemeret,
 Hep ober dezàn nep offañç.
 Hac e digass gant dilijanç.
 Qemeret oue hep resistañç
 Ha cunduet dirac noblanç,
 Rentet da velet d'an itron,
 E ty ar C'homt a Varcelon.
 Er merchossi e oue leget,
 Ha gant ur gorden oue staguët,

Ha tolet dezán da zébri
 Tamou bara, evel d'eur c'hi.

Eun devez e oue preparet
 E t'in autrou Comt ur banquet,
 Ha conviet nombr a noblanç,
 Evit ober rejouissanç.

Pa oant oc'h an dol azezet,
 Ar gompagnunez echoffet,
 E larjont digas var ar plaç
 Dezo da velet ar sovach.

Eur vagueres a voa en ti
 Gant eur buguel daou vis pe dri,
 Hac a antreas er zal d'an ec'h,
 Gant ar buguel-se var e brec'h.

Ar buguel er c'honsideras,
 Ha distinctamant e lavaras :
 Breur Yan Guerin, sao alesse,
 Grêt eo da accord gant Doue.

Incontinent an ermit mad
 A zavas prest var e zaou droat,
 Ar gompagnunez estonet,
 A chomas pell-bras d'e velet.

Var e zaoulin en em laqas,
 Dirac ar C'homt e lavaras :
 Me eo Yan Guerin ar mechant,
 Goas eguet barbar na tirant.

M'emeus ho merc'h disenoret,
 Ha goude e meus-hi lazet ;
 Rac-se eta, grit varnòn justic,
 Prest oun da zouffr an oll suplic.

Dezàn ar C'homt a respontas
 Gant douçter, hep aroganç vras :
 Pa zout pardonet gant Doue,
 Va mignon, m'es pardon ive.

Incontinent an autrou mat
 A eure prest digas dillat,
 Evel eun den a voa e graç,
 En devoa grêt pinijen vras.

Varben eun daou deis goude se,
 Ar C'homt, inspiret gant Doue,
 A zesiras a galon vat
 Mont da visita Montserrat.

Hac a bedas da vont ganta
 Breur Yan Guerin d'e asista,
 Ha disquès dezàn an andret
 M'en devoa e verc'h enterret.

Breur Yan Guerin a voa contant,
 Hac a yas ganta prontamant,
 M'en em rentjont hep pell dale
 Assamblamant var ar mene.

Pa voant erru, e tiscuesas
 Breur Yan Guerin dezo ar plaç
 M'en devoa ar verc'h enterret,
 Goude m'en devoa-hi lazet.

N'o devoa nebeudic toullet,
 An demêzel o deus cavet
 En buez yac'h flam ha dispos,
 Ilac hi qer rus ha boqet ros,
 En e gouzoug e oa chommet,
 En andret ma oue egorjet

Ur merqiq henvel oc'h hini
Eun neuden a zeiz cramoazi.

An autrou Comt pa e güelas,
Digant e verc'h a c'houlennas,
Petra ma oa c'hoas en bue,
Ha pe seurt tourmant a zante.

En instant ma ouen egorjet,
Ha diaraog em boa bepret
Particulier devocion
D'ar Verc'hez santel, va itron.

Hi e devezs va c'honservet
Amàn hep santout poan ebet,
Na naon, na sec'het, na tourmant,
Dre c'hraç Doue an oll-buissant.

Deut ganén, eme e zad dezi,
Ha me laqai ho temezi,
M'ho laqai en ho plijadur,
Gant eun den ha prudent ha fur.

Salocroas, emezi, va zad,
Dezir a meus mar be ho crat,
E ve grêt amá eur gouent
E gloar da Rouantelez ar zænt.

Ma chommin a hed va bue
Er plaç-mâ da veuli Doue,
Da Drugarecât hon Autrou
Hag e Yam, eus o oll graçou.

An autrou Comt a acceptas
Dezir e verc'h, hac a laqas
Divar e goust heb retardamant,
Sevel prompt, eno eur gouant.

Dont a reas hep pell dale
 Merc'het devot a bep contre,
 D'acompagnunecât merc'h ar C'homt,
 O chastete a brometjont.

Breur Yan Guerin pareillamant
 A lavaras e oa contant
 Da dremen ar rest eus e vue
 Da vez directour déze.

Eno en deus het cunduet
 Eur vuez santel ha parfet;
 Ha goude o buez mortel
 E maint er joa eternal.

Va breudeur ha va c'hoareset,
 A greis va c'halon ma ho ped,
 Da veza devot d'ar Verc'hes,
 En ên en douar rouanes.

Nep a zo enni e fizianç
 A ell beza en assuranç,
 Biscoas nicun ebet collet
 A guement er c'harje parfet.

Clêvet oc'h eus ur miracl bras,
 Grêt amâ ganti dre e grac?
 En andret un demezel, guès
 A voa bet dezi devodes.

Christenien devot m'ho suppli
 Da veza devot da Vari,
 Ha dre e moyen hac asistanç
 O pezo en ên recompanç. FIN.

E. MONTGOUERZ, Imp. a Imprimeri LÉDAN.

